

KANTIK

Evit Chapel nevez

ITRON VARIA LAMBADER

E PLOUVORN

Benniget gant an Aotrou'n Escop, d'an 9 a viz Guengalo 1877

DISKAN :

Saludomp oll Mam hor Zalver
E chapel nevez Lambader,
Hag ar Verc'hez hon diouallo
Bréman hag en heur hor maro.

1

Pegen dous eo d'am daoulagad
Guelet savet ti hor Mam vad,
Guelet Lambader paour ha noas
Hirio kaeroc'h evit biskoas.

2

Evel eur brinsez eo guisket
Gant he zae mein dentelezet
An heol var douar Breiz-Izel
Ne velo ket ker brao chapel.

3

Ar pillerou nerzus ha teo
A zo henvel ouz gwez dero ;
Dindan ar beac'h ne blegint ket,
Chom a rai soun ho fenn kalet.

4

Ma koustas deomp, ha koustet eo,
Bezomp laouen evelato :
Rei d'ar Verc'hez, rei da Zoue
A dal ouspen prena leve.

5

Lochennik soul ha ti balan
Ne vezont ket savet eb poan,
Mogerioù mein, toennou glaz,
A zo gantho poan vrasoc'h c'hoas.

6

Ar boan avad, evel ar pell,
Abred a nij gant an avel ;
An ti a jom, d'he vestr e ro
Disheol en anv, er goanv disklaou.



Aman ivez disglao, disheol
E skeud Mari zo 'vit an oll,
Aman kouls hag er feunteun ven
Eo kre an dour en eienen.

Evit hag evit, tud fidel,
Dour beo ar vuez eternal ;
Evit dour ar grassou nerzus
A red euz kalon Mam Jezus.

Guechall branellou, chadenou
A velet ouz ar mogerioù :
Aman c'hoas e vezo kavet
Al liberte hag ar iec'hed.

Ia, pec'her paour, ia pec'herez,
Mar pedit gant feiz ar Verc'hez,
Ne viot mui sklavourien Satan
Ho chadennas da gass d'an tan.

Bennos deoc'h, Plouvornis, bennos
Da veza bet treac'h d'ho tud koz,
N'ho meulin ket, rag ho chapel
E deuz mouez, mouez huel.

Ho tour ivez, eur vech savet,
Vezo buzudus da velet ;
Tour all ebed, nemed Kreisker
Ne vo par da dour Lambader.

An durzunel, ar guennili
O deuz eun deiz d'ho goudori ;
O Lambader, c'hui vo bepred
Va neizik-me, va neiz karet !

Da zeiz ankenius ar maro,
Gant fizians vras me lavaro :
Digorit din, aotrou Sant Per,
Mab oun da Verc'hez Lambader.

Imprimatur : Quimper, 21 Août 1877.

DU MARHALLACH, Vic. gén.

Guillem
Perron
Pannourc'h